


6



KANTIK

ENN ENOR

DA ZANT EWOAN



War don : *Kelven.*

Kânomp laouen, Kristenien, kânomp a vouez huel
Eur zant dre holl ker brudet, ganet e Breiz-Izel ;
Mellezour ar veleien, brasâ enor hor bro
Ha Patron ar Vretoned, sant Ewoan he liano.

DISKAN

Sant Ewoan, pa z-hoc'h hon tad, ni zo ho pugale ;
Grêt ma vezo hor peden selaouet gant Doue !
Ma kerzimp holl er bed-mâ bepred war ho roudou,
Evit ma vezimp gan-hoc'h evuruz enn envou.

Mar d-hoc'h bremâ evuruz, enn envou azezet,
Trubuillou war ann douar evel-d-omp hoc'h euz bet :
Krenâ a ra hor c'halon gant ar spont aliez,
Pa zeuomp da zellet piz ouz hor zempladurez.

Ar c'hik, ar bed, ha Satan, hon enebour touet,
A stourm hep paouez ouz-omp, sant Ewoan hor miret :
Enn env dirag hor Barner komzet evid-omp holl
Enep ann drouk-sperejou, harzet na d-imp da goll.

Bretoned ann Arvorik, galloud hor breur zo braz
Koulz war ann douar kaled evel war ar mor glaz ;
Mar digouez eur bâr klenved, eur c'holl pe eur walen,
Ar zec'hor pe ar gernez, gret d'ezhan ho peden.

Lenñ a r r enn he vuez e-leiz a vuzudou ;
Biskoaz n'en deuz dilezet nep den enn he boaniou ;
Tud mac'hagnet ha tud klan, c'houi c'hallfe lavaret
Pegen gallouduz eo sant Ewoan binniget.

Intanvez hag emzivad, kemend a zo er boan,
Enn anken, enn dienez, c'houi bedo sant Ewoan ;
Karet en deuz ar re baour gw ch-all war ann douar,
Hag h n zeufe d'ho ankou t pa ma brem  er gloar !

M s evit ma selaouo sant Ewoan ho peden,
Eunn dra ive, Bretoned, digan-hoc'h a c'houlenn :
Dalc'het bepred d'ho Toue, dalc'het stard d'he lezen,
Hag enoret dreist pep tra hoc'h hano a gristen.

Gant-se 'ta, 'vel ho tadou, c'houi a viro ar fe,
A zalc'ho d'ar c'hizou mad a zeu d-eomp digant-he :
Roet at  ann aluzenn d'ar paour ouz toull ho tor,
Mar fell d'hoc'h kavet eunn de hini ann env digor.

Kaset prof d'ann ilizou evid mad hoc'h ine,
Ha gant hoc'h aluzennou prened enn env leve ;
Eur werenad dour hep-ken r tet aman d'eur paour
A vo paeet enn envou gand eur gurunen aour.

O sant Ewoan, hor Patron, c'houi a vezo hor skouer ;
Ni viro ar burete, ho fe hag ho tousder ;
Evel-d-hoc'h ni a garo hon Doue da genta,
Hag a zikouro bepred enn he boan hon nesa.

J.-M. M.

IMPRIMATUR :

Brioci, die 10^a Maii 1900.

LE PROVOST, *Vic. g n.*